

Tirage différent du 930 A OLLIVIER

POT LEUHAN

COMPOSET

ER BLOAVEZ 1895

Var Sujet eun Orolacher Yaouank

1^{er} Couplet

Disdotet cos a yaouank, tud a bed qualite,
Da selaou cana eur chanson composit a neve
Savet gant eun den yaouank eus a bars Leuhan
E ma deut en he speret da rei divertissamant.

2^e Couplet

Betec an oad a bemzec vloas e ma bet er scolach.
Habil oalc'h 'vit besa cloarec a non pas davantach,
Neuze a teuas d'ar guer, gant e vam ag e c'hoar
Evit sicour anezo da labourad douar.

3^e Couplet

Eun tamic 'roc oan deut en oad vit tenad ar billet,
Evit avanc an appel e oan nem engaget,
Quemeret oan da zoudard bars an infanterie,
A nao mis just goude oa caporal fourier

4^e Couplet

Goud e bed e Paris, Besançon ace Noamet,
O tesqui ober montchou, a goalenou euret.
Brenan e za d'an Oriant, Brest a da Bontivy
A gant e velociped ve quet pell vit mont di.

5^e Couplet

Bale a ra gantan, dre bevar c'horn ar vro,
Vit regla meur e orloch, kerkouls ac ar montchou;
Rac hounes eo e vicher desket mad e gantan,
Seis vloa so ma ober nei, partout dre ar vro-man.

6^e Couplet

Ouspen var en etad-se e neus gret e studi,
A nomp pas guis ma ve cals, o clesq nem juveni
Pa ven var dro eun oroloch ven diou heur eus en foeltra,
Rac allas, ne ouzon quet pelech ve an dalc'h ganta.

7^e Couplet

Cals seurt-se e vez guelet breman o vale partout :
Pe hant var dro eun horloch ne ven quet 'vit tallout
O pedi a ran, eta, tollet evez oute,
Clasquet tud a vo gouziabl, dont var dro en traou-se.

8^e Couplet

Setu ase eun avis profitabl vit an oll :
Nep en deus eur mont mad ne gaff quet ez en coll.
Laret meus ar virionez ne gredan quet e treïtour :
Ne garan quet enor va dorn da vastouilla labour.

9^e Couplet

Car me so c'hoas den yaouank, en fleur va yaouankis,
A Mlich din labour vad evit caout benefic.
Evelse me gontinuo do chom da zen yaouank.
Da roula va yaouankis, quen mo cavet va choant.

10^e Couplet

Mes bars an amzer bresant eo ret bea subtil
Vit conversi gant merc'hed ne non quet c'hoas agil,
Car vit c'hoas ne ouzont quet demeus o distroyou ;
Breman e velan parfait o deus, cals a ruziou.

11^e Couplet

Ret voa dign gout an doare ac ar c'homzou secret,
A studi an dispud ben coseal ouz merc'hed.
Allas! en amzer presant, guelet ran pep hini ;
An dud yaouank nouzont quet penoz nem zigueri.

12^e Couplet

Mes quen avanç davantach pa ma deut em speret.
Aman raon eur gompliment, var sujet ar merc'hed,
Ac a bouez var an deguis etouez an dud yaouank
E velan er Finister, couls ac er Morbihan.

13^e Couplet

Gant savancherou sei glas, dantelez tro var dro,
Rubannou a friseyer, mesquet gant o guimpou,
Ar payetou a luguern, e ve mesquet d'hoas gante,
Sclaër a brillantoc'h c'hoas eus an eol, da greis-de.

14^e Couplet

Cals eus merc'hed breman so carguet a ardou :
Manegou var o douarn vit o empech da rouza,
A gant o foulardou sei cœffou scouret a dren,
A bleo friset var o sal e ven pentet dan en.

15^e Couplet

Re Gourin a Rosporden, a re Coray ive,
Re Scaër a Bannalec so c'hoas ed, tual de,
Peill ha perl eus proyou, tre betec an anter,
Voulouz seis a chenill demeus o savancher.

16^e Couplet

Ha ne quet ar re hebkeu o deus commodite
Lod a laq var o chouq ar pez o deuz a zanve
A pa ven guisquet evels, even o rejouissanç
Quen a larfec'h, eus o guelet, netra noc'h nô fresane.

17^e Couplet

Gouscoude so er vro-man merc'hed brao, delicat,
A nem hent c'hoas en eur mod a guisquet gant reklasq
Eur speret ac eur furnez. ac en air agreabl.
Ac ar feson do barlant a blijfe certain dam grad.

18^e Couplet

Quen a garfen vijen bet evit plijout do dezir :
Evidon, en o souez. an amzer ne ve quet hir,
Ne c'oulenfent quet guelloc'h evit cavout consequanc
Breman e quear a Rosporden e meus va demeuranc.

19^e Couplet

A vo em zi horlochou. montchou aour ac arc'hant,
A reveillou a bep seurt. bep hini hervez e c'hoant,
Rez vo bars cals articlou croæjou, medalennou,
Goalennou aour ac arc'hant evit an eureujou.

20^e Couplet

Dont a ran eta do pedi quement so e manach.
Deut eta betec enon da brena peb a horolach.
Goazet a merc'hed yaouank, quement so er c'hanton
Deut breman da Rosporden da brena beb a vont.

21^e Couplet

Na vezit quet betec goul pa vezit er assuranc
An hini drompign da guenta me rayou droug chang
Eun horloch pe eur mont. seurt e vezo do grad.
Me vo prest do tiguemer ac o servicho mad.

22^e Couplet

A pa vanqfe din ar metal, evit renqua ober ane.
E bars eun devez pe daou me a yal da vit ;
Guis meus eur velociped ne ven cals genet :
Vit ober heis leo an heur alies am eus gret.

23^e Couplet

Ac eguis ma zon den yaouank balle ran dre ar vro ;
Me meffe cals plijadur o velet marvailhou,
Car ober ar vicher-se pehini ou gouyabl
Labour oalc'h em eus gant eur pæ resonabl.

24^e Couplet

Occupi a ran breman eus ar vicher am beus
Ac ar merc'hed a loscan orned ganit o frileus
Mar fel deoch gout a clevet piou neus ar zon man gret
E hano var ar paper zo Alexandre Louet.

25^e Couplet

Ac evit discleria e oad d'an oll dud ignorant
E ma ren e unec mis an tu all da tri chant.
Aman teuan da lavaret ar fin eus va adress,
Ben vin et scuis den yaouank me choaso eur vestres.

26^e Couplet

Couscoude, 'vel den yaouank, me so diambarez,
A ma tiguez din dimi me vo eur pez diez,
Ouspen ma velociped, a vo ret tol a gostez,
A caout en e plaç eur c'haros. pa hin da vale.

27^e Couplet

Elec'h unan, ni renco mont on daou,
Dreist pep tra ma vo wel din, stumet gant marvailhou.
Ha pa m'om c'hoant da bourmen e vimp daou er voitur.
Mar vemp e memeus sentiment, ni nefo plijadur.

28^e Couplet

Mes da c'hortos quement-se, an amser a vo hir,
Car vit c'hoas ne ouzon quet pelec'h ma va dezir ;
Me, ma carjen, vijen bet c'hoas bars em régimant
Offret oa din quen don d'ar guer. eun eil rengajamant.

29^e Couplet

Mar vije bet digouet dign beza nem rengaget,
A caout avançamant, neuze vijen chomet ;
Mes laquet en em jonj, ac ive em speret,
Da gontinui ar vicher, eguis ma oa din glead.

30^e Couplet

Aman e teuan, mignonet, breman da finissa,
Ne gredan quet ve ebars offaus vit den de facha,
Laret meus ar vrionez, ar pez ar velan sclær,
C'houlan quet digueri va beq da lavaret gueyer.

31^e Couplet

Ar zon-man zo bet savet tri devez roc ar zul.
D'an unec a vis ebrel, neur renkulæeur pendul,
Bars ar blavez mil eis cant pemzec a pevar uguent,
E oan bet eus e scriva, tre va c'hoan a va leign.

32^e Couplet

Canet anezi breman var eun ton divertissant
Curius d'ar re gos. amus an dud yaouank.
Evidon meus e scrivet gant cals a blijadur ;
Chanç da guement e c'hlevo da gavout mil bonheur.

(Propriété réservée.)

